



Ai'ta! Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

Le 12 novembre 2012

COMMUNIQUE DE PRESSE

LANGUE BRETONNE À LA POSTE : UNE AVANCÉE POSITIVE QUI EN APPELLE D'AUTRES !

La Poste inaugurerait la semaine dernière à Carhaix son tout premier bureau bilingue français / breton. Le collectif Ai'ta ! qui milite depuis 2007 pour que la langue bretonne soit valorisée dans les agences postales se réjouit de ce premier pas et félicite La Poste d'avoir pris en compte la demande répétée de nos militants ainsi que de très nombreux Bretons. Pour rappel, notre collectif avait organisé en juin dernier une votation citoyenne devant le bureau de poste de Carhaix, avant que les travaux ne commencent. Le résultat était sans appel : sur 128 votants, 127 se prononçaient en faveur d'une prise en compte de la langue bretonne !

Ai'ta ! demande à La Poste de poursuivre ses efforts dans la prise en compte du breton dans ses services. Tout d'abord, **en terminant la mise en place de la signalétique dans le bureau de Carhaix pour que celui-ci devienne un véritable site-pilote**, un exemple à suivre et à mettre en place dans les autres villes de Bretagne. Nous demandons ensuite à ce **qu'un site-pilote équivalent au site carhaisien soit ouvert dans les mois qui viennent dans le Morbihan ainsi que dans les Côtes d'Armor**, là où la demande sociale est la plus forte.

Par ailleurs, la direction de La Poste Ouest Bretagne a recensé au cours de l'été dernier l'ensemble de ses agents brittophones présents dans les postes du Finistère et du Morbihan. Nous attendons maintenant que La Poste aille jusqu'au bout de sa démarche **en proposant à ses employés volontaires d'afficher leur compétence linguistique sur leur lieu de travail** par l'utilisation d'un badge. Ainsi, les usagers qui le souhaitent pourront bénéficier auprès d'eux d'un service en langue bretonne.

Contact : 06 31 18 17 71 ou ai.ta.breizh@gmail.com



Ai'ta! Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

D'an 12 a viz Du 2012

KEMENADENN D'AR GAZETENNERIEN

BREZHONEG ER POST : UR BAZENN WAR-RAOK DA C'HORTOZ REOÙ ALL !

E Karaez e oa bet digoret war an ton bras er sizhun dremenet ar c'hentañ burev Post divyezhek galleg / brezhoneg. Stourm a ra ar strollad Ai'ta ! dibaoe 2007 evit ma vo talvoudekaet ar brezhoneg en tier-post. Laouen omp neuze o welet eo bet selaouet ar wech-mañ ar goulenn hon eus savet dizehan, evel Bretoned all, d'Ar Post. Degas a reomp da soñj d'an holl e oa bet aozet ur votadeg keodedel dirak burevioù ti-post Karaez e miz Even, da lâret eo a-raok na vefe boulc'het gant al labourioù. Splann e oa an disoc'hoù : diwar 128 a dud o doa votet e oa 127 a-du gant ar brezhoneg en ti-post nevez !

Ai'ta ! a c'houlenn d'Ar Post derc'hel da strivañ evit talvoudekaat ar brezhoneg en he servijoù. Da gentañ-penn oc'h **achuiñ da staliañ ur banellerezh vrezhonek e burev-post Karaez evit ma teufe da vezañ ur gwir lec'hienn-arnodiñ** koulz hag ur skwer da adsevel er c'hêrioù all e Breizh. Goulenn a reomp goude **ma vo staliet er mizioù da zont un ti-post heñvel ouzh hini Karaez er Mor Bihan koulz hag unan en Aodoù an Arvor**, e-lec'h m'emañ kreñvoc'h goulenn ar bobl.

Ouzhpenn da se he doa renablet renerezh Kornôg Breizh Ar Post e-kerzh an hañv tremenet an holl implijidi a oar brezhoneg e burevioù-post Penn ar Bed ha Mor Bihan. Gortoz a reomp bremañ ez afe betek penn o **kinnig dezhe lakaat war-wel en o lec'h-labour, gant ur badj, ar fed ma ouzont brezhoneg**. Evel-se e c'hallo ar praktikoù a fell dezhe bezañ servijet e yezh ar vro.

Mont e darempred : 06 84 14 63 39 pe ai.ta.breizh@gmail.com